


**EMSAV**



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 35 - Du 1969

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F  
Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV  
30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

---

Kasit gwerzh hoc'h adkoumanant adal bremañ, mar plij. Trugarez.

---

T a o l e n n

Doareoù dibarek eus ar framm dispac'hel . . . . . p. 329

An Emsav hag ar Vro (20) [EMVR-101 - 110] . . . . . p. 340  
Lizheroù p. 340.

Notennoù Politikel (9), Bevennadur beli al levierion.  
II.- Araezioù bevennañ beli al levierion . . . . . p. 351

## DOAREOU DIBAREK EUS AR FRAMM DISPAC'HEL

E meur a lec'h e ro skridoù an Emsav spisadurioù war ar framm dispac'hel. E Danevelloù 1964 S.A.D.E.D. da skouer e kaver termenet natur an darempredoù renet dre ar framm, tra ma kinnig ar studienn Petra eo ar framm (1) emcannet e 1968 un damkaniezh hollek eus diwan ha kresk ar frammoù. Ar pennad-mañ a blede gant an tu embregel hag, a-ziforc'h, gant kudennoù pleustrek al labour emsavel frammet hiziv an deiz.

Steuñv ha raklun

Dav eo da gentañ merkañ an diforc'h etre an daou zoare a zo da raktresañ an obererezh : ar steuñv hag ar raklun.

E berr, ar steuñv zo ur raktres resis ha munudaouet. Ar raklun, un durc'hadur hollek. Ne vez steuñvet nemet an obererezhioù a c'haller rakwelout ha rakjediñ war-bouez forc'hadoù bihan a-walc'h, - lakaomp da skouer ar beajerezh war ul linenn hent-houarn. Pa vezer avat e domani an darvoudoù dirakjedadus evel ar politikerezh, e ranker tremen gant raklunioù. Ober a reer gant steuñvoù en armerzherezh, gant raklunioù er politikerezh.

Dre un hent all da sellout ouzh an traoù, e lavarer ez eo ar steuñv an doare da raktresañ an obererezh kefridiadel, ar raklun an doare da raktresañ an obererezh politikel.

Kefridiadel a reer eus un obererezh renet e-keñver amkanioù stabil hag aes da furmekaat (2). Kefridiadel eo al labour en un ti-post, rak skoueriekaet eo pep gread ennañ. Kefridiadel eo ivez labour ur greanti : dav eo d'ar renerezh heuliañ neuennadoù an nevid a-benn azasaat outo ar c'henderc'hadur, met n'eus aze a priori gread ebet na ve ket furmekadus. Kefridiadel eo an ober armerzhel; moarvat ned eo ket peurzigemm an amkanioù armerzhel na peurrakjedadus an nevidoù, pell diouzh eno; savelegezh a-walc'h zo enno evelkent evit ma ve lakaet steuñvoù da dalvout gant frouezh.

Politikel a reer eus an obererezh renet e-keñver amkanioù war loc'h ha difurmekadus. E lec'hioù all (3) e kaver displegadurioù hiroc'h a-zivout heloc'hted an amkanioù politikel. Amañ e tremenimp gant ur skouer hepken. Lakaomp e ve div riez diorreet o reiñ o skoazell a-getep (4) d'un drede riez isdiorreet a-benn he sachañ dindan o levezon. Kevreizhañ a ray pep hini hec'h emzalc'h diouzh emzalc'h he c'hevezerezh hag ivez diouzh emzalc'h ar riez skoazellet, pep hini eus an tri emzalc'h levierzhel-se o terc'hel kont diouzh



e du eus stad ar c'hedveno en teir bro. Anat eo ne vo ket renet aze ar skoazell armerzhel hervez ur steuñv, rak an amkan n'eo ket armerzhel met politikel : gounit an drede riez da gevredadez. Evit tizhout an amkan-se e ranko pep kevezerez ijinañ dizehan hentoù nevez a ve trec'h d'an hentoù anavezet. Ouzhpenn rakjediñ e ranko mont dreist rakjedoù eben. N'eo ket steuñvoù a vo azas met raklunioù o verkañ un durc'hadur hollek ha nann furmekaet.

E buhez ur riez e vez ereet-strizh labour politikel ha labour kefridiadel. Saveladur ar c'hellidsteuñv a c'houlenn divizoù politikel, met kefridiadel eo an erounezadur anezhañ. Daoust da se ez eus domanioù a denn muioc'h en holl d'an ober kefridiadel ha reoù all a denn muioc'h d'an ober politikel. Domani pennañ ar steuñvoù eo an armerzh. Domani ar politikerezh glan eo darempredoù diavaez ar riez. Merkomp ivez an digempouez splann a gaver en holl riezoù etre perzhiadur kefridiadel ha perzhiadur politikel ar boblañs. Galvet e vez ar boblañs a-bezh da gemer perzh en obererezh kefridiadel, tra ma vez miret en obererezh politikel e-ser un dornadig politikerion a vicher.

#### Doareoù politikel ar framm dispac'hel.

Ent furmel ez eo heñvel a-walc'h obererezh ur framm dispac'hel ouzh hini levierzh ur riez. Steuñvoù a rank arverañ, evit stummadur e izili hag evit an arc'hant da skouer. Evel ar politikerezh stadel e ra ar politikerezh dispac'hel ivez gant raklunioù gwevn ha digor ha gant durc'hadurioù hollek.

#### Politikeloc'h eo ar framm dispac'hel eget ar framm stadel

Disheñvel eo avat dasparzh an daou seurt obererezhioù er framm dispac'hel hag er framm stadel. Kalz bihanoc'h eo da gentañ ar gennad steuñvel gant ar framm dispac'hel. Ne vez ennañ e-pad pell steuñv armerzhel ebet, - pa ra an elfenn-se ar pep pouezusañ eus gennad steuñvel ar riez.

Arbennañ a reer e voe e-pad pell an ober kefridiadel ar rann bouezusañ eus obererezh E.S.B. : pa c'hoarveze eus aozadurioù-kelenn dreist-holl e chome steuñvel al labour ennañ. Pep framm dispac'hel zo dezhañ e zoare dibarek d'en em grouiñ. Amañ ez eer tre en dispac'h dre ar stourm c'hweluniadel, aze dre ar stourm strolladel, ahont dre ar stourm brezelel. E Breizh en deus ar stourm sevenadurel c'hoariet ur roll bras : drezañ e tremenas an

hent o kas d'ar gelennadurezh ha d'ar framm dispac'hel. Arabat evelkent kammgemer an hent d'an dispac'h evit an dispac'h e-unan. Ar framm dispac'hel ne c'halle diwanañ nemet o tistremen hag o tisteurel an amkanioù sevenadurel ha, war un dro, kement amkan digempoell danzeet er prantad rakzispac'hel, ha pa ve an amkanioù-se armerzhel, kevredadel pe politikel. Ne zeraou ar prantad dispac'hel nemet pa vez kemeret amkanioù en un darempred a gem-poellded gant pal an dispac'h. Neuze e vez enbarzhet obererezh ar prantad mont-tre en obererezh dispac'hel e-unan, ha war un dro gantañ e vez enbarzhet an obererezhioù all eus ar prantad rakzispac'hel, - goude tremen dre an adteuzadur oc'h ober dezho bezañ kempoell gant pal an dispac'h. Gougevanet eo bremañ er framm ar stourm sevenadurel ouzh ar stourm dispac'hel. Unan hag unan e rank gougevaniñ outañ ivez ar stourmoù rakzispac'hel all, o tont da vezañ obererezhioù diabarzh anezhañ, isurzhiat d'ar politikerezh dispac'hel (5).

Ar brasañ diforc'hioù etre framm dispac'hel ha framm stadel avat n'emañ ket e par ar gefridiadelezh, met e par an ober politikel. Gwelet hon eus penaos ez arc'hwel ur framm stadel. Ur wikefre bonner eo, ma vez dispartiet un niver bihan a zivizerion hag un tolpad bras a erounezerion dalc'het start gant ur stern postek. Un dornadig oc'h ober politikerezh er ster leun, ur yoc'h o c'houzañv ar politikerezh-se hag alies o tibolitikaat.

Er c'hontrol, er framm dispac'hel e rank ar politikerezh bezañ graet, n'eo ket gant un nebeut arbennigourion, met gant pep ezel. Ar framm stadel a c'hoarvez eus ur c'horf kefridiadel ramzel gant ur penn politikel dister, eus ur biramidenn gefridiadel vras a zo politikel ar beg uhelañ anezhi nemetken. En enep, ez eo ar framm dispac'hel ur rouedad astennet d'ar vro hag en hini ebet eus he mailhoù ne vez dispartiet al labour kefridiadel diouzh al labour politikel. En ur Stad en deus pep keodedour ar gwir furmek da vezañ maodiern pe tevezeg met hogos hini ebet ne c'hell embreger ar gwir-se. En ur framm dispac'hel emañ gant pep ezel, n'eo ket hepken ar gwir pe an dlead, met ar redi da gemer diastal disentezioù politikel, da vezañ ur politiker a vicher.

Ar framm dispac'hel zo strewet dre ar vro

Ur rouedad astennet d'ar vro eo ar framm dispac'hel. Penaos e

c'hell an Emsav chom frammet ha strewet war un dro ? Gant frammadur an dispac'herion emañ nerzh an dispac'h, hogen gant o strewadur dre ar boblañs emañ gwerc'h an dispac'h. Hag un dislavar embregel n'eus ket aze ? Unan ez eus a dra sur. N'eo ket bet dianavezet gant an Emsav. Dre an embregerezh hepken e c'halle bezañ diskoulmet. Setu perak e rankomp, evit studiañ an diskoulm anezhañ, deskrivañ an argerzh-diskoulmañ heuliet gant ar framm, war un dro gant ar c'hud-ennoù dibarek a zo savet dirazañ e pep prantad eus an argerzh-se.

Eus an diazezadur diabarzh d'an eztroadur.

Keit ha ma voe E.S.B. en e brantad frammañ e chomas kloz warnañ e-unan. Pep aozadur anezhañ a zigore war-du an diabarzh. Ne oa etre ar framm hag ar boblañs darempred ebet koulz lavarout. Kreskiñ a rae e-kreiz bouilhoñs-tiñvañ al luskadoù sevenadurel, int o-unan hep darempred gant ar boblañs (6). Evit kejañ war-eeun gant tud ar vro en doa an Emsav frammet da dremen dreist ar metou ma oa war un dro maget ha bac'het. Setu perak e voe unan nac'hel e gentañ preder politikel diavaez : unan hag unan e troc'has al liammoù etrezañ hag al luskadoù sevenadurel. Frouezh ur monedone embregel-damkanel rik e voe an troc'hadurioù-se : bep ma spisae damkaniezh ar framm e tistone e embregadoù diouzh al luskadoù en gronne; ha bep ma kreske an enebadur etre al luskadoù-se hag embregadoù ar framm, e ranke hemañ gounit emrenerezh, diorren an arc'hwelioù hag an organoù a vanke dezhañ ha, seul vuanoc'h a se, kas war-raok e zamkaniezh. En hevelep doare, hag e-ser an hevelep daelerezh, e tiskarzhe kement ezel a skoilhe an argerzh frammañ.

Hogen an argerzh frammañ-se n'en deus ster ebet drezañ e-unan (7). Ne voe nemet ar prantad kentañ, nac'hel e meur a zoare, eus ar mont-tre en argerzh dispac'hel. Keit ha ma voe an izili troet war-du an diabarzh, e troent kein ouzh ar boblañs. Padet eo seizh vloaz prantad an diazezadur diabarzh. Deraouiñ a reas gant krouidigezh S.A.D.E.D., echuiñ a ra gant frammadur politikel E.S.B.. Echu eo ar prantad entroadur, deuet eo mare an eztroadur. Emañ ar framm oc'h eilpennañ, o treiñ tu evel ur vaneg, o kas da benn e darzhadur tir-



iadel. Hiviziken e vez darempredoù pep hini gant ar boblañs da gentañ. Ar fiziañs hiziv ne zeu ket eus un Diellva-Kreiz, met eus ar straed.

Penaos derc'hel unvan ar framm strewet ?

Goulenn a reer : penaos mirout ar framm en e unvanded ur wech ma'z eo strewet dre ar vro ? Ha n'eo ket dañjerus, goude ar gwariadur grevus c'hoarvezet en hantervloaz kentañ 1969, laoskaat al liammoù diabarzh etre ar c'helligoù hag etre an izili ?

Arvar ar gwariadurioù.

Micher arvarus eo ar politikerezh. Ne vez skoilhus an arvarioù avat nemet keit ma ra diouer an armoù evit parraat outo. Met ur wech dizoloet an armoù azas ouzh un arvar, en em gaver gwarezet ouzh an holl arvarioù a hevelep seurt hag e-se e kaver an tu d'ober ur c'hammed nevez war-raok : an arvarioù eus ar rumm-se a baouez a vezañ kudennoù politikel evit bezañ hepken kudennoù kefridiadel standur. Evit kompren penaos e roas dispennidigezh ur gwariadur an tu da beurober frammadur politikel E.S.B., ez eo mat ren en-dro un damsell war istor ar gwariadur strolladelour.

Amkan ar gwariadur strolladelour oa lakaat ur strollad bruderion dezennoù e-lec'h ar framm diazezerion ha dispac'herion ez eo E.S.B..

Abaoe bloavezhioù e oa er framm un nebeut izili o tanzen tezennoù strolladelour. E lec'h all (8) ez eo studiet an tezennoù-se ha diskouezet ez eus anezho aspadennoù eus tezennoù ar PNB, - lakaat e brezhoneg tezennoù ar PNB ne ra ket diouto tezennoù dispac'hel. Gouzañvus e voe da gentañ atebion ar framm ouzh an emzalc'hioù strolladelour-se, dre zaou arbenn : a) eztaolet gwan e vezent, - nepred ne gemeras o eztaolerion ur roll bras nag e labourioù S.A.D.E.D., K.D., pe en aozadurioù politikel E.S.B., - dre-se e vezent renket e-touez an dañjerioù bihan b) n'edo ket e kerz an emsaverion ar binvioù ret da zebrannañ ha da reizhañ ar gwariadur-se.

E 1967 koulskoude, pa voe graet ur c'hammed nevez war-du politikadur ar framm gant krouidigezh ar gelaouenn Emsav, e voe meizet an dañjer o kreskiñ ha klasket parraat outañ, - n'eo ket ent reizhiadek, da heul un dezrann damkanel, met war an dachenn, bewech ma anade. Da skouer e veze nac'het pe adteuzet ar pennadoù a oa re fraezh enno an tuadurioù gwarius. E-pad daou vloaz e voe renet seurt oberata kantouezel e-ser dezrannadurioù darnel ha diembann.

N'eus nemet e 1969 e voe staget da vat gant un dezrannañ politikel klok ha reizhiadek war obererezh E.S.B.. Kevanaet e voe ar

gelennadurezh (9) hag e stagas an emsaverion da gaout o binvioù-dezrannañ etre o daouarn. Tu a voe da gaout krog war gement tezenn o redek e-maez hag e-barzh E.S.B., ar re o klotañ gant poellelezh ar framm dispac'hel hag ar re all.

E-se e voe kaset dillo da benn dezrannadur ha dispennadur an tezennoù gwarius. War un dro e voe buanaet peursavidigezh ar binvioù-dezrannañ gant an daelerezh renet ouzh dalc'hidi ar gwar-iadur strolladelour.

Keit ha ma voe danvez gwariadurioù o c'hoiñ e diabarzh E.S.B. hep ma ve an emsaverion e piaou d'an armoù ret evit o dispenn, e oa dic'hallus da E.S.B. en em dreiñ war-du an diavaez. An nebeut arnodoù eztreiñ renet e-pad bloaz, e-ser ar c'helligoù kentañ, o deus anataet a-walc'h an argoll a oa eno.

Bremañ m'en deus ar framm gwiriet emañ en e gerz ar binviadur da zezrannañ an oberoù hag an darvoudoù, da zinoiñ ha da zispenn ar gwariadurioù enta, e c'hell en em dreiñ war-du an diavaez hep tennañ warnañ muioc'h a zañjerioù eget ma vez er pleustr politikel ordinal.

#### Arvar an diempradur etrelec'hel

Penaos emañ enta er pleustr kudenn unvanded ar framm ur wech strewet an emsaverion dre ar vro ?

An emsaverion n'int ket tud sklerijennet gant ur skiant dreist-natur, n'int ket sklaeridi, met tud evel ar re all. En arvar emaint d'ober fazioù, ha fazioù a raint c'hoazh a dra sur. N'eo ket amoet neuze goulenn ha rakwelet eo bet an arvar a zo da gaout adarre un diempradur etrelec'hel evel an hini a reuzias etre ar c'helligoù kentañ, ha raksellet an doare da barraat outañ.

Eztroadur an Emsav ne dalvez e nep doare e ticuero hiviziken an darempredoù frammel. En enep, evel ma tisplegomp pelloc'h, e teu darempredoù frammel a seurt nevez war-c'horre ar re gentañ.

Ar fazi-se a anavezomp : izili 'zo n'o deus ket gortozet prantad ar frammadur politikel evit mont d'ar boblañs. Hag aet int o-unan-penn, hep kaout en o c'herz ar binvioù ret. Goude bezañ labouret daou pe dri bloaz er framm, o deus en em dennet en ur c'horn eus ar vro ha staget da galfichat o aozadurioù dezho, distag diouzh ar framm. Emañ ganto ar "spered emsavel", emezo. Pa zezranner avat ar pezh a reont, e tizoloer buan e klot o oberoù gant an obererezh a rene ar framm er mare end-eeun m'o deus e



guitaet, hag ez eo an aozadurioù savet ganto un heklev eus aozadurioù ar framm evel m'edont er mare-se ivez. O "spered an Emsav" zo ur spered dispredet, o mennozioù hag o oberoù n'int mui nemet heklevioù divouedet eus ar mennozioù hag an oberoù a oa re an Emsav daou, tri ha pevar bloaz a-raok. N'o deus ket merzet ar riskladur istorek a c'hoarveze, ha tizhet int bet gant anadenn an tre (10).

Ar skouer splannañ eo houmañ : e 1967 ha 1968 e voe arveret Kelc'h Debauvais evel benveg brudañ ha tuta en tu all d'e roll kelenn. Un devoud reol e voe pa ouzer ne ziwant ket diouzhtu organoù an arc'hwelioù nevez hag e vez sammet ar re-mañ en o derou gant organoù kozh da c'hortoz diwan an organoù nevez azas. Reol e voe enta an arc'hwel-harpañ sammet gant Kelc'h Debauvais evel organ da c'hortoz evit ar brudañ hag an tuta; ha reizh e voe e stern an arc'hwel-harpañ-se en defe c'hoariet roll ur greizenn sevenadurel digor war an diavaez. E 1969 avat ez eas diezhomm an arc'hwel-harpañ-se dre an arbenn ma oa sevenet ar frammañ politikel ha lakaet drezañ en o flom organoù azas an darempredoù politikel diavaez. Direizh eo hiviziken derc'hel skolioù brezhoneg hag Istor digor rag-eeun war an diavaez.

Setu koulskoude ar pezh a ra emsaverion 'zo, hep merzout ez eo dispredet bremañ seurt embregadenn. Emsavel oa ar skolioù brezhoneg hag Istor digoret gant Kelc'h Debauvais tri bloaz 'zo. Ne oufe bezañ estreget ledemsavel ar skolioù heñvel digoret hiziv. Ne oufe an Emsav bezañ heklev dezhañ e-unan (11). An nini na gemer ket perzh korfel e labourioù hag en emgannoù ar framm a riskl buan e maezienn an heklevioù, eleze el ledemsav.

#### Ar framm dispac'hel zo digreizennet don ha kreizennet strizh

Tarzhadur tiriadel ar framm ne dalvez e nep doare emañ o vont da gemer ur furm difetis hag arouezel. Er c'hontrol, enbarzhet emañ bremañ ar reizhiad kefridiadel kozh en ur reizhiad politikel nevez, e doare ma'z eo ar framm dispac'hel war un dro digreizennet don ha kreizennet strizh.

Digreizennet don eo ar framm dispac'hel : pep emsaver el lec'h m'emañ a rank kemer divizoù e-unan ha sammañ an atebegzh anezho. Frankiz vras zo gant pep kellig da ren he labour, frankiz an oberoù ha frankiz ar mennozioù.

Kreizennet strizh eo ar framm dispac'hel : rak ar frankiz-se ne oufe bezañ emsavel hep an dlead groñs evit pep hini da zebrannañ pep ober ha pep mennoz e-keñver poellelezh an Emsav. E gerioù all, ezel ebet, kellig ebet ne ren ober politikel ebet hep reiñ an displ-

egadur eus ar pezh a ra, hep gouzañv an dezrannadur emsavel eus ar pezh a ra. Ul levierzh a-c'houde-taol eo al levierzh dispac'hel, ur reolerezh dre an dezrannañ.

Ger-stur an emsaver zo : gra ar pezh a garez, gant ma vo kavet emsavel da c'houde. Na vezomp ket touellet : ar ger-stur-mañ ned eo frankizour nemet evit ur gwel. Ar c'helligoù kentañ ivez a rae ar pezh a garent, met ne renent dezrann emsavel ebet eus ar pezh a raent. N'en graent ket peogwir ne oa enno nep emsaver stummet a-walc'h evit gouzout ren an dezrannañ emsavel. Ar ger-stur a ampeg enta a) ur stummadur klok ha gwiriet (12) b) ur c'hreizennadur strizh eus ar framm fetis dre an dezrannañ emsavel.

Aes eo meizañ ez eo disheñvel-bras ar c'hreizennadur politikel diouzh ar c'hreizennadur kefridiadel a vez o ren e Skourr an Deskad-urezh da skouer. Disheñvel-bras ivez meizad an atebegzh en eil tu hag en egile. Evel kefridiad ez eo an emsaver atebek war erounezadur ur steuñv. Evel politiker ez eo atebek war dezrannadur an oberoù e-keñver poellelezh an Emsav fetisaet er raklunioù politikel.

#### Stuz nevez an emsaver.

Diwar an alberz-se eus ar frammadur politikel e c'haller kompren penaos emañ o kemmañ buan stuz an emsaver ha stuzegezh an Emsav-kevredigezh.

#### Emrended an emsaver er framm dispac'hel

Re dechet oa betek-henn an emsaverion da reiñ o fiziañs d'ar re a sellent evel renerion an Emsav. Ar fiziañs etre dispac'herion zo ur fiziañs rez-ha-rez, ne oufe bezañ ur fiziañs etre rener ha rener. An tech da glask renerion a roe alies an tu da ziflipout diouzh micher enkrezus ar c'hemer divizoù - ha, da heul, da ziflipout diouzh micher arabadus erounit an divizoù - ken ma c'hoarvezas e-pad pell an Emsav eus ur gronnadig tud graetanvet renerion o kemer an divizoù hag ouzh o erounit e-kreiz doujañs abaf ur gronnad arvesterion a vicher. An tech-se, a renas en Eil Emsav hag e derou

an Trede, ne c'haller ket lavarout e oa aet da get c'hoazh e-doug prantad frammañ E.S.B.

Hiviziken en em gav pep emsaver sanket er boblañs. Dezho d'en em zibab war an dachenn da luskañ an argerzh dispac'hel dre an holl hentoù a gavint mat. Moarvat pa vint gennet gant un diaester bennak ne redint ket war-du al levierzh da gerc'hat an diskoulm. Dezho e vo da arverañ dereat an aveadur lec'hel ha dreist-holl o binviadur hiniennel. Hag aze e ranker menegiñ da gentañ penn an testennoù politikel.

Kejañ a reer c'hoazh gant izili n'o deus ket kemeret ar boan da lenn na da gompren an dezrannadurioù embannet da geñver pep kammed eus an Emsav. Morc'hed a ziskouezont : "Ya, dleout a rafen ..." evel pa vije un dlead divezel lenn Emsav.

Gant ar frammadur politikel e kemer Emsav dre ret he c'hefridi reizh : bezañ lec'h-gwilioudiñ ar gelennadurezh, bezañ al lec'h ma kav pep emsaver e stumm gerioù ster an ober a ren war an dachenn, ma ne gav ivez nemet ar pezh en devez degaset, - eleze pouez damkanel an oberoù en devez embreget.

Dav eo diskuliañ c'hoazh an emzalc'hioù faos a vez e-keñver an testennoù politikel.

Keneiled 'zo a gred dezho e rankont lenn Emsav hag, ivez, heuliañ Emsav. Eilpennañ a reont an traoù. E-lec'h reiñ danvez d'an Emsav dre un dezrann eus e obererezh e klaskont e-barzh skridoù an Emsav reolennoù evit o obererezh dezho, pezh na gavont ket evel just.

Keneiled all a sell ouzh Emsav evel ur "gelaouenn a vennoziou". Ar re-mañ peurliesañ diempret-kaer o "mennoziou" diouzh ar pezh a reont, zo fortunius a-walc'h evit chom seder e-kreiz an diempredurioù : nag a ledemsaverion a glever oc'h estlammiñ ouzh Emsav ha dreist-holl ouzh ESB 1, hep merzout an disterañ ez eo dispennet razh kement a reont gant an testennoù a veulont.

Mar bez eztaolet mennoziou ha reolennoù war Emsav, ez int mennoziou ha reolennoù o deus talvezet c'hoazh, a c'hallo talvout c'hoazh, marteze, met n'eo ket sur : un niver mat a vennoziou hag a reolennoù politikel ne dalvezont nemet ur wech. Evel ur c'hevala e rank bezañ intentet an testennoù politikel, ar re embannet gant Emsav evel ar re all. Treuzfurmet e vez pep kevala gant ar c'henderc'hañ : ul lodenn a ya da get, uzet e vez ul lodenn all, ha dispredet ul lodenn all c'hoazh. Pep kevala, ha seul vuic'h a se ar c'hevala dispac'hel, a rank bezañ distrujet e-ser ar c'henderc'hañ, - ar framm dispac'hel e-unan ne oufe ket tec'hout diouzh an argerzh distrujañ-krouiñ a zo keflusker an Emsav. Testennoù Emsav drezo o-unan ne gasont da netra : ne oufe al lenner tennañ mad ebet diouto anez kemer perzh oberiant el labour distrujañ-krouiñ dispac'hel a ro dezho o fetisted istorek (13).



Aze emañ kentañ poent ar stuz nevez emañ an emsaverion o wiskañ dre berzh ar frammadur politikel : treiñ war-du enno o-unan ar fiziañs a droent war-du renerion, sammañ atebegzhioù bras, diorren o c'hejusted gant tud o bro, ar pezh nad eo netra nemet piauouañ o emrended a zispac'herion, frouezh prizius ar politikadur.

### Onestiz an emsaver er framm dispac'hel

Onestiz ar c'hefridiad zo e-keñver an dikted el labour. Dizonest eo a-berzh ur c'helenner lezel e genwazourion da gontañ warnañ pa na ray ket al labour en deus gouestlet seveniñ. Da veizañ eo an onestiz-se e-keñver an divezouriezh emsavel : ar pezh a zo e kont eo bezoud ar framm; ar framm kefridiadel dispac'hel n'en deus bezoud nemet dre zikted e izili; grevus-bras eo dizonestiz ar re-mañ e-keñver labour kefridiadel rak lakaat a ra en arvar diazezoù an Emsav e-unan (14).

Skañvbenn a-walc'h eo izili 'zo eus aozadurioù kefridiadel an Emsav evit gwallegañ o labour : "Kement-se zo dibouez a-walc'h, emezo, ar politikerezh hepken a gont". Met penaos diorren ur politikerezh kempoell ha kendalc'hel hep un diazez stabil a oberiadegzh kefridiadel, setu moarvat ar goulenn na zeuas biskoazh war o spered.

Pouezusoc'h c'hoazh eo onestiz ar politiker, eviti da vezañ a zoare disheñvel : emañ e-keñver ergoregezh. Dizonest eo an emsaver na oar ket sellout ouzh ar pezh a ra gant daoulagad ergorek. Ar sell ergorek ned eo ket ar pezh a anver ar sell "naturel", met ar c'hontrol anezhañ; dalc'hidi ar sell "naturel" en laka da zont eus un diantegzh-natur a gredont enni. Ar bolitikerion avat ne gredont ket en diantegzh-natur, hag ar sell ergorek ne oufe bezañ nemet disoc'h ar stummadur, eleze frouezh un embleustr dizehan ha didruez. Piauouer an ergoregezh emsavel hag eñ nemetañ a dalvez fiziañs e geneiled. Da veizañ eo ivez an onestiz politikel e-keñver an divezouriezh emsavel : ar pezh a zo e kont zo ivez bezoud ar framm dispac'hel; rak dre an dreuzwelusted ez eo an ergoregezh emsavel e tremen ar framm; aze emañ poell ar c'hreizennadur anezhañ.

Pell omp aet diouzh stuz ar c'helligoù kentañ, pa guzhent o

oberoù evit mirout na vent barnet gant tud "a-vaez kellig", pa gave mat o izili chom mut en emvodoù hollek a-benn tec'hout diouzh an dezrannadurioù. An emsaver o nac'h dezrannañ ar pezh a ra, pe gwashoc'h o touellañ e geneiled war ar pezh a ra, a laka un torr-adur er framm. Poell embregel ar framm zo an emouiziegezh unvan a ren e pep poent anezhañ. An ezela chom hep emouiziekaat e labour zo evel un transistor marv en ur benveg skinwel; lamet kuit hag amsavet e rank bezañ evit ma teuo fraezh ar skramm en-dro.

An dispac'her n'en deus netra da guzhat ouzh den. Doublet e vez e holl oberoù gant an dezrannadur emsavel anezho. Ha reizh pe faziek e vent ez int dre-se oberoù eus an Emsav.

- (1) Sl. Emsav 14/33 1968.
- (2) Sl. Ar framm ha furmekadur al labour, id., ibid.
- (3) Sl. Arc'hwelioù al levrierezh, Notennoù Politikel (6), Emsav 31/213 ha /220, /225 pergen; Amkan, pal, finvez, Emsav 34/295 1969.
- (4) Ketep ag., a-getep av., pep hini ent distag; sk.: gwirioù ketep ar roue hag ar bobl (= gwirioù ar roue ha gwirioù ar bobl sellet diforc'h-mat); Pêr, Yann, Herve o deus bet, a-getep, dek lur, pemzek lur, ugent lur (Pêr en deus bet dek lur, Yann pemzek, h.a.).
- (5) Sl. Poellelezh an Emsav, Emsav 30/163 1969.
- (6) Sl. Enkadenn ar bloavezhioù pemont, Emsav 3/54 1967; "Breiz Atao" hag an daelerezh-dieubiñ, Emsav 33/263 ha /275 pergen; Kemennadenn Stroll-Leviañ E.S.B., Emsav 34/309 ha /315 pergen 1969.
- (7) Nac'hel ha dister e hañval bezañ labour politikel diavaez ar prantad frammañ. Hogen e dalc'h al labour diavaez-se edo tonkad ar framm. Setu perak ez eo bet an troc'hadurioù hag an diskarzhioù darvoudoù politikel a-bouez, ar re gentañ krouet gant E.S.B.. N'o deus ster avat nemet e-keñver ar prantad dispac'hel fetis a zo o tont, - setu ivez perak ez eo dic'hallus o meizañ d'an neb na gemer ket poellelezh an dispac'h da boell e vuhez.
- (8) Sl. Kemennadenn Stroll-Leviañ E.S.B., Emsav 34/309 1969.
- (9) Sl. Unvanadur an istoregezh, Emsav 32/231 1969.
- (10) Sl. Amkan, pal, finvez, Emsav 34/295 ha /297 pergen, 1969.
- (11) Sl. Al ledemsavioù, Emsav 5/113 1967; war /115 e kaver termenet anadenn an heklek.
- (12) Sl. Unvanadur an istoregezh, Emsav 32/231 ha /235 pergen, 1969.
- (13) Sl. Penaos meizañ kevredigezh an Emsav ?, Emsav 29/131 ha /134 pergen, 1969.
- (14) Sl. Danevelloù 1964 S.A.D.E.D., 7.Kel-14/1 ha /18 pergen.

A N E M S A V H A G A R V R O ( 2 0 )

LIZHEROU

"Lennet em eus un dra bennak eus Emsav diwezhañ. Souezhet on bet gant ar varnadenn diwar-benn ar Chouanerezh. Kaout a ra din ez eo awenet gant barnadennoù eus ar Skol-veur c'hall; met ne glot ket tamm ebet gant ar pezh am eus lennet. Sellout da skouer ouzh ar Roueri, ar Bastion. Al lodenn vrasañ eus ar Chouaned vras ne cant ket tud a relijion, na chalet kement-se gant ar Roue... Pa welan ivez petra 'zo chomet betek-henn eus ar spered chouan e-touez ar bobl e Breizh, ez on souezhet ivez gant ho parnadenn : rak spered chouan a zo, hag a chom c'hoazh, ha tamm ebet ar pezh a lavarit. Tost-kaer eo avat d'ar mennoz broadel.

"Ret e vefe da vihanañ kemer an traoù gant un tamm ledander spered : n'eus fed istorel ebet a c'hallfemp sterniañ en ur soñj strizh hag eeun." (06 10 69) EMVR-101

Dave a ra hon c'henskriver d'an destenn embannet e-ser dan-velloù Devezhioù Studi Mur war Emsav 33/287, - ha moarvat ivez da arroudoù all a-zivout ar Chouaned evel ar re a gaver war Emsav 22/293, 26/43, 28/112.

Ar pezh a c'haller rebech d'an destenn eo kinnig ur gweladur eeunaet betek re eus ar Chouanerezh, - da gement testenn skolel a zo eo d'ober an hevelep rebech. Lavaromp koulskoude ne oa an destenn-mañ nemet ur steuenn-loc'hañ evit ar bodadoù-studi.

Anat eo e voe meur a Chouanerezh. Da gentañ, un darn vras eus ar Chouaned ne cant ket Breizhiz; met o tont eus Vendée, Anjou, Maine, Normandie. Chouaned vrezhon 'zo o devoe mennadoù politikel brogar, evel ar Roueri, met diaes e ve lavarout e talc'he ar vrogarouriezh ul lec'h bras en nerzhoù a luske ar poblañsoù da stourm ouzh an Dispac'h gall. Pet lugan broadelour pe zoken brogarour a c'haller lakaat e-skoaz ar vordilh a luganoù relijiel ha roueelour a gaver e kement testeni war ar Chouaned deuet betek ennomp ? (1).

Istorourion c'hall 'zo a zispleg ar Chouanerezh evel un emsavadeg kouerion a-enep d'an enrolladeg en armeoù ar Republik. Hanezek eo evel just seurt tezenn o vont a-ruz d'an darvoudoù hag o welout e pep hini an heuliad rik d'an hini diaraok. Ha gwelout a ra ivez ar C'hallaoued-se ar Résistance evel emsavadeg an dud a nac'he mont d'al labour ret da Alamagn ?

Gant istorourion vreizhat e teu displegadurioù all : "Derou ar Chouanerezh zo bet relijiel. Emsavet o deus ar gouerion p'o deus gwelet e raed an heg ouzh o beleion; diwar rustoni ar



moustrerezh e teuas nerzh d'an emsavadeg. Hag e stagas neuze ar Chouaned d'en em gannañ evit o gwraez, o bugale, o madoù dister. Lavarout a ran deoc'h : evit o avaloù-douar. O fersoned hag o avaloù-douar" (2). Ken hanezek-all eo an displegadur-mañ, pa na daol ket sklerijenn, etre traoù all, war ar pezh a ra hon c'henskriver ar "spered chouan" anezhañ.

Diforc'hioù don oa ivez etre rummoù an emgannerion dre berzh o c'hendereoù disheñvel. Kaer vo lavarout e veve an noblañs hag ar gloer vrezhon nes d'ar werin, o deskadurezh c'hallek ha pa na ve ken a vire outo a vevañ tre en hevelep bed ganti. Ha kement-se zo pouezus-bras da verkañ pa ouzer an disklotadur don a oa er mare-se etre ar gefredourion c'hall pe europat ha gwerin Vreizh. Houmañ a oa ganti bepred an doare da welout ar bed a oa bet hini ar Grennamzer, - doare-gwelout a anvomp "bedouriezh kravezel" ("kravezel" n'eo ket "relijiel" : holl Grennamzeriz ne oant ket tud a relijion evito da gaout an hevelep meizadur kravezel eus ar bed). N'eo ket amañ al lec'h da zeskrivañ dre ar munud ar vedouriezh krennamzerel, - graet eo bet al labour-se gant an istorourion, ar gevredadourion, an doueoniourion (3), h.a.. Ar pennañ azon anezhi eo an neveted lakaet war an Natur, ar veli, an arz, an armerzh, ar gevredadelezh, en ur ger war gement tra a ya d'ober ar bed. War an dachenn bolitikel en em gavas fetisaet ar vedouriezh-se tro-ha-tro e kefridiezh kravezel an Impalaer (4), er velegveliezh difennet gant Pabed'zo (5), e gwengel ar roueelezh a wir doueel (6) a voe damkaniezh kefridiel, furmek, ar riez c'hall betek an Dispac'h, - a zo c'hoazh o ren, arouezel-rik, er riez saoz hiziv. Merket eo end-eeun dibenn ar Grennamzer gant diskar ar vedouriezh kravezel-se; houmañ a yeas da get er vuhez politikel gant diwanadur ar riezoù broadel, er sevenadur gant diorreidigezh ur preder hag un arz bedel, en armerzh hag er gevredadelezh gant ar meizadur nevez a rae eus an Natur un teskad nerzhoù da vestroniañ ha n'eo ket ken un domani nevet da zoujañ (7), - e lec'h all hon eus tro da verkañ penaos ez eo seurt disrann etre nevet ha bedel, seurt dinevetadur eus an Natur, ur frouezh eus ar Gristeniezh (8). N'eo ket dreistezhomm adlavarout amañ o deus Breizhiz c'hwitet war Reverzhi Bolitikel dibenn ar Grennamzer, koulz ha war ar Reverzhi C'hreantel ha war diorreadur ur preder hag un arz bedel (9), - betek Gwalarn da nebeutañ. Ar c'hwitadennoù-se zo kemend-all a azonoù eus an devoud-mañ : chomet eo Breizhiz gant bedouriezh ar Grennamzer kalz pelloc'h eget an darnvuiañ eus ar pobloù all. Ha pa stourmjont ouzh an Dispac'h gall, e stourmjont evel tud eus ar Grennamzer ouzh ar bed nevez dinevetaet a glaske o aloubiñ. Evel m'hon eus lavaret c'hoazh (10), ne oa an Dispac'h gall dispac'h nemet evit ar C'hallaoued; evit Breizhiz e voe hepken un taol-buanaerez o sanke muioc'h c'hoazh en arallekadur hag en anistor. Ne c'haller ket avat ober eus emgann ar Chouaned ur meni "dispac'h brezhon" faezhet, dre an arbenn eeun ma'z eo an dispac'h diazevidigezh ur vedouriezh

nevez, ha nepred difennidigezh ur vedouriezh graet ganti hec'h amzer.

En un doare e c'haller lavarout ez echu ar Grennamzer vrezhon e 1914 (11). Souezh ebet neuze e ve c'noazh e kornioù 'zo eus Breizh Chouaned ha tud o karout o douar genidik evel ma rae ar Chouaned. Tu zo bepred da welout er garantez-se ur furm a vrogarouriezh. Dlead an emsaverion zo, forzh penaos, mont d'an dud-se evel d'ar Vrezhoned all. Met, evel d'ar Vrezhoned all, ez eo d'an dud-se da zont d'an Emsav, da ziskenn eus o C'hrennamzer, ha n'eo ket d'an Emsav da gilañ betek enno. Evit bezañ an dispac'h brezhon e rank an Emsav sammañ kevala istorek ar bed betek an deiz a hiziv, - hag er c'hevala-se emañ frouezh ar Grennamzer moarvat, met ivez frouezh an Azginivelezh hag ar Reverzhi Bolitikel, frouezh an Adreizhadur hag ar Reverzhi C'hreantel, frouezh an emsavioù rezidellour, kevarzhellour hag an dispac'hioù tarzhet diouto, - an Dispac'h gall en o zouez, - ha n'eus anv ebet evit an Emsav da ziskregiñ diouzh ar frouezhioù-se.

- 
- (1) Boutin eo e kanaouennoù ar Chouaned an troiennoù evel an hini a gaver e trede gwerzenn ar poz-mañ :
- Keméret enta exempl dioar bautred iaouank  
Péré a ia d'ar hombat gand an er ker koutant,  
'n ur grial : viv ar Roué ! viv ar relijion !  
Kreski a ra ou houraj, pa dosta an Nasion.
- (François CADIC, Chants de Chouans, p. 30, Paris 1949).
- (2) François CADIC, id. p. 11. Meneget eo an arroud-mañ er rakskrid gant Y.LE DIBERDER, a skriv ivez : "Nepred ne voe da Chouanerezh ar Morbihan un orin nag un dedroadur broadellour brezhon".
- (3) Sl. da skouer : H.U.Von BALTHASAR, Die Gottesfrage des heutigen Menschen, Wien; tr. c'hallek : Dieu et l'homme d'aujourd'hui, Paris 1958.
- (4) Sl. da skouer, er Pontifikal otonian savet e Mainz e-tro 960, an ordo evit binnigadenn an Impalaer : diskleriet eo fraezh ez eo Doue a ro dezhañ e impalaeriezh.
- (5) Sl. da skouer ar builh Aeger cui levia embannet gant ar Pab INNOCENS IV goude didroniañ FRIEDRICH 2 e 1245 : "Ne c'hell ket beli ar gouarnamant bedel bezañ embreget er-maez eus an Iliz peogwir n'eus ket a veli ensavet gant Doue er-maez anezhi".
- (6) Sl. Galloud ha reizhveli, Notennoù Politikel (3), Emsav 27/79 1969.
- (7) Sl. H.U.Von BALTHASAR, levr meneget : "Ar pezh a gemm e prantadoù bras emdroadur an denelezh eo keñver an den ouzh an natur" (p. 33 tr.c'h.). "Ha koulskoude, ma n'en dije



ket spered mab-den trehontet urzh an natur evel ma ra dre ar ouezoniezh hag ar c'halvezerezh, ne vije nepred disoc'het gant an doare-se da welout an natur a ra anezhi da vat ar prientadur hag an diazez eus mab-den evel spered. Hag evel pa rofe an natur sentus da herded ar spered ur respont a zeufe da gantreizhañ ha da gadarnaat kalonegezh mab-den, e ranke an alvez (ar bed naturel) bremañ mestroniet en e wrizioù, paouez a vezañ un danvez a gehelerezh hag a entan hogos kravezel" (p. 48 tr.c'h.).

- (8) Sl. Ar galloud hag ar gwir, Notennoù Politikel (3), Emsav 27/86; id. (8), ibid. 34/318, penaos he deus ar Gristeniezh roet d'an hinienn gwirioù trec'h da wirioù ar c'horfoù naturel evel ar Stad, h.a. Dre vras, e c'haller lavarout kement-mañ : ar Gristeniezh, o tiogeliñ tonkad peurbadel mab-den ha darempred personel an hinienn gant Doue, he deus lusket an argerzh istorek a ro da vab-den an tu da drehontiñ an natur, - ar pezh a zo war un dro he dinevetaat.
- (9) Sl. Pêr DENEZ, Hent hor barzhoniezh, rakskrid da vBarzhaz, Al Liamm 1953. "Ma'z eo bet unton hol lennegezh dre ar stumm, ez eo bet ken unton all dre an awen. Ul lennegezh a relijion ez eo, evel n'eus hini all ebet marteze er bed a-bezh".
- (10) Sl. Ster ar Chouanerezh e Breizh, EMVR-62, Emsav 28/111 ha /114 pergen, 1969.
- (11) Sl. "Breiz Atao" hag an daelerezh-dieubiñ, Emsav 33/263 ha /265 pergen, 1969.

E/EMVR-101

"E niverenn diwezhañ Emsav e vez meneget disfiz, droukrañs zoken pobl Vreizh a-enep Breiz Atao.

"War un tu all e red, pe ac'hoel e rede, ar vrud e voe niverus-tre lennerion, koumananterion vBreiz Atao. Kalz niverusoc'h c'hoazh lennerion an Heure Bretonne (meur a viliad, hervez).

"Penaos dezrannañ an dislavar-se ?" (20 10 69) EMVR-102

N'eus dislavar ebet evit gwir. Ret eo lakaat e kont avat an holl elfennoù. Mar keñverier gwerzh B.A. pe H.B. gant gwerzh kazetennoù breizhek an eil goudebrezel e c'haller kavout e oa "niverus-tre" o lennerion. Dister e chome evelkent an niver-se (un nebeut kantadoù, un nebeut miliadoù d'ar muiañ) p'en keñverier gant gwerzh kazetennoù all ar mare, evel Ouest-Eclair. An diforc'h etre gwerzh "uhel" B.A. pe H.B. ha gwerzh izel ar c'hazetennoù breizhek abaoe 1945 a denn d'ar strivoù kalonek renet e-pad ugent vloaz evit aozañ ar bruderezh ha diorren Breiz Atao. Ur gazetenn hepken eus hon amzer a c'haller lakaat e-skoaz B.A. : Le Peuple Breton eo; ne c'haller ket lavarout e laka muioù c'h a reuz da sevel er boblañs eget Breiz Atao, met oberiantiz padus hag urzhiet he gwerzherion a laka da sevel ingal niver he gwerzhioù.

E/EMVR-102



"Da heul darvoudoù ar mizioù tremenet hag an dezrannoù a zo bet graet anezho ez eo deuet splann din al lamm war-raok a zo bet graet gant an Emsav abaoe an eil Brezel-bed. Klasket em eus gwelout ar pezh en deus degaset an Trede Emsav hag ar pouez o deus an degasadennoù-se e buhez an Emsav. Setu un darn eus va evezhiadennoù.

"Tra ma c'houlenne an Eil Emsav an emrenerezh evit Breizh e verk an Trede Emsav ar Stad da bal fetis an Emsav. Gant an Trede Emsav eo bet termenet tamm-ha-tamm petra eo ur Stad ha petra eo ur framm stadel. An termenadur-se zo aet war spisaat bep ma kreske ar framm dispac'hel. Savidigezh ar framm dispac'hel he deus lakaet war wel pouez dibar ar framm e buhez ar gevredigezh. Pa gomzer eus framm stadel e c'haller kregiñ da sevel ar framm-se, hogen pa gomzer eus emrenerezh ne weler ket re vat penaos en em gemer evit sevel an emrenerezh war an dachenn. Un diforc'h bras ez eus aze etre an Eil hag an Trede Emsav.

"An Trede Emsav en deus kroget da studiañ ar gevredigezh arall-ekaet a zo e Breizh gant binvioù ar gevredadoniezh ha klokaet ar binvioù diouzh e ezhommoù. Kealioù ar stuzegezh, ar speredegezh pe an diempradur zo binvioù prizius evit deskrivañ stad an traoù er vro-mañ. Setu ar pezh n'eo ket deuet an Eil Emsav a-benn da ober. Nepred n'eo bet fraezh evitañ ar pezh a oa da virout hag ar pezh a oa da zistrujañ e Breizh en e vare. Nepred n'en deus komprenet e oa diskar ar gevredigezh vrezhon henvoazel ur redi politikel groñs. Nepred n'en deus graet ar c'hemm etre doareoù diavaez ar vreizhadelezh hag an doareoù diazez. N'eo ket dre zegouezh eo bet "salvet ar biniou" (bras ha bihan) gant tud chomet dindan levezon an Eil Emsav.

"Gant keal ar c'hevala istorek e oar an emsaverion diforc'hañ an tremened marv ha didalvoud diouzh pinvidigezhioù gwirion hor pobl. An istor ! Ne ouie ket an Eil Emsav petra eo an istor, daoust ma laboure e-unan war an hent a gas Breizhiz eus an anistor d'an istor. Er mare-se ne veze kontet nemet hanez Breizh. Dre-se ne oad ket evit enebiñ, en un doare poellek, ouzh ar savboentoù gall.

"Gant an Trede Emsav en deus ar poell kemeret ul lec'h bras a oa dalc'het gwechall gant an trivliad. E-lec'h ober dave da drivliad an emsaver e reer dave d'e boell. Gwechall e oa Breizh un uhelvennad. Ar re a oa estren d'an uhelvennad-se a oa, dre ret, estren d'an Emsav hag e chome, dre ret, an Emsav kloz evito. A-berzh an emsaverion lakaat ar stourm dieubiñ war bazenn an uhelvennad a oa diwelout an emgann fetis ez eo an daelerezh-dieubiñ hag erziwezh tec'hout diouzh an emgann gwirion. Bremañ hepken e c'haller kregiñ da skrivañ istor Breizh. Se a dalvez e c'hell bremañ hepken perc'hennañ e gwirionez, eleze en un doare emouez hag ent werc'hek, ar c'hevala istorek brezhon.

"Gwechall ivez e veze termenet ar bobl evel hollad ar Vrezhoned arallekaet pe get. Kudenn an Emsav a oa "mont d'ar bobl". Ret e oa mont d'ar bobl peogwir e oa en em droc'het an Emsav diouzh ar bobl. Bremañ avat e veiz an Emsav ar c'heñverioù etrezañ ha peurrest ar boblañs en un doare disheñvel-krenn : eilpennet eo bet ar c'heñver-

ioù. An Emsav eo ar bobl vrezhon; en un doare all e lavarer se : gwriziennañ a reer en Emsav, an hini a sank gwrizioù en Emsav zo brezhon. Talvoudus eo avat dezrannañ keal ar "mont d'ar bobl". E derou an Eil Emsav ne oa troc'h ebet etre an Emsav hag ar boblañs. An hevelep emskiant reuzeudik o doa, nemet ez eztaolent an emskiant-se e daou zoare enebek. An Eil Emsav en deus savelet ur gweladur eus pobl Vreizh diwar an ersavioù enebek-se : pobl Vreizh zo (dre natur lakaomp) enebet ouzh an Emsav. Ha diwar ar gweladur-se en deus krouet un troc'h etrezañ ha pobl Vreizh.

"Kement-se zo pouezus. N'eo ket ar pep pouezusañ, da'm meno. An dachenn m'en deus graet an Emsav an araokadennoù brasañ, an dizoloadennoù pouezusañ zo er striv en deus graet evit en em anaout e-unan. Ne c'halle ket an Emsav diskoulmañ kudennoù Breizhiz a-raok diskoulmañ e gudennoù dezhañ. Diempret eo ar gevredigezh arallekaet a zo e Breizh; diempret eo bet an Emsav. Adempradur ar gevredigezh arallekaet a grog gant adempradur an Emsav. Adempradur an Emsav en deus aotreet unvanadur an istoregezh. An degouezh-mañ, ken pouezus hiziv hag unvanadur ar yezh dec'h, a ro d'an Emsav ha da bobl Vreizh an tu da vestroniañ he zonkadur. Evit ar wech kentañ en e istor en deus an Emsav ar binvioù meizel ret evit dezrannañ pep elfenn eus e vuhez.

"Keal al ledemsav, a vefe da hollekaet, en deus degaset sklerijenn war gudennoù diabarzh ha diavaez an Emsav. Gant keal al ledemsav e komprener an islonk a zo etre ar framm dispac'hel hag an heklevioù anezhañ. Bremañ hepken e oar an Emsav penaos emañ an dachenn-emgann : diouzh un tu ar framm brezhon, diouzh an tu all ar framm gall hag er framm-se al ledemsavioù. Pep luskad en deus ur roll resis en emgann. War un dro ez eo diskoulmet kudenn an unvaniezh. Ar re a wel aze ur gudenn c'hoazh ne glaskont nemet un dra : unvaniñ al ledemsavioù er framm gall.

"Diglok kenan eo an evezhiadennoù-mañ. Pep elfenn a vefe da zisplegañ dre an hir o reiñ skouerioù hag all... Koulskoude n'eo ket didalvoud gwelout an hent a zo bet graet gant an Emsav."

(22 10 69)

EMVR-103

"() ur c'hazetenner ezel eus an emsav kernevat. Lies gwech em boa komzet dezhañ diwar-benn Emsav, na oa ket evit anaout dre n'eo ket brezhoneger. Touellet e oa dre ma kave dezhañ da gentañ ne oa nemet Bretagne-Action o tiskouez dremm wirion an Emsav. Dav eo bet din displegañ dezhañ e oa ar re yaouank-se leun a youl vat, nemet e choment c'hoazh war vevenn an Emsav hep muiken. Gant al levrig em eus spi e welo sklaeroc'h penaos lec'hiañ ar gudenn ha, marteze a-walc'h e vo gouest da skignañ an hentennoù pleustret gant Emsav e-touez tud Kernev-Veur ha Kembre n'int ket aet pell-oc'h eget hon Eil Emsav-ni. Souezhet e choman pa verzan pegen warlerc'hiet e c'hell bezañ, a-fet kelennadurezh, tud tramor. Ledemsavek int peurliesañ, evit gwir, dre lakaat da dalvezout well-wazh evit o c'heltva ar patromoù saoz. Hini anezhe, koulz



lavarout - nemet gweriniaethwyr Gembre pe 1320 Club Alba - ne soñj teurel d'ar blotoù ar framm saoz. Ha c'hoazh."  
(24 10 69)

EMVR-104

"Goût a ouzon emañ ar gwir ganeoc'h hag E.S.B., hogen kalz a dud zo a-enep deoc'h en abeg d'ho toare da stourm, ha diaes eo kompezañ ar skoilhoù-se. War ar marc'had em eus klevet un trouz bennak, un troc'h zo c'hoarvezet etrezoc'h ha Youenn Olier. Un tammig diseven diouzh va ferzh eo goulenn seurt traoù diganeoc'h, hogen nec'het on gant seurt trouzioù. Sellet em eus ouzh S.A.D.E. D. hag E.S.B. betek bremañ evel ouzh an aozadur nemetañ e-lec'h ma labourer an emsaverion holl unanet en hevelep spered, ha bremañ e welan e c'hoarvez ennañ an hevelep disrannoù c'hoarvezet er M.O.B.. Pell emañ diouzh an unvaniezh hor c'haso d'ar pal."  
(26 10 69)

EMVR-105

Respont d'e atersoù en devo kavet hon c'henskriver war Emsav 34/309. Hep mar e voe poanuis evit izili 'zo eus E.S.B. lakaat Youenn OLIER er-maez, met hepken war dachenn al liammoù prevez. Rak e-keñver politikerezh ne voe ket kalz kudennoù. Klask a rae dihentañ E.S.B. hag ober anezhañ ur strollad politikel en dije kevezet ouzh M.O.B., U.D.B., Sav-Breizh, Bretagne-Action, F.L.B. ha ni oar. En ur ober kement-se en em gave er-maez eus ar framm evel m'en deus kresket abaoe derou S.A. D.E.D.. Diskarzhañ Youenn OLIER zo bet hepken reiñ ar ster emsavel d'ar pezh a rae. Emañ bremañ oc'h adlivañ Emsav Pobl Vreizh, ar strollad politikel en doa klasket sevel ouzhpenn ugent vloaz 'zo. Mirout a ra doareoù 'zo da labourat en deus gwelet en arver gant ar framm, met kement-se ne ra nemet lakaat muioc'h a-wel ar forc'hadur etre ar pezh a ra hag ar framm. Kenderc'hel a ra da skouer d'ober gant ar ger "ledemsav" (sl. Kannadig Kêr-Vreizh 35/6 Gouere 1969), met gant ur ster dishañvel rik diouzh ar ster orin. Al ledemsav n'eo ket mui evitañ un anadenn daelerezhel, al linkradur devoudet gant levezon an emsav dispac'hel er framm sujer (sl. Emsav 33/289), met ur meizad skeuliadek : "ledemsavioù" eo ar strolladoù kevezer d'e hini, peogwir ez eus enno ur c'hementad bihanoc'h a vrezhonelezh. E penn uhelañ ar skeul emañ E.P.V. gant ar brezhoneg hag ar "spered broadel", ur meudad izeloc'h emañ moarvat ar M.O.B., ledemsav 40 % peogwir ez eo "broadelour" gant 10 % a vrezhonegerion... Ne lavar ket avat petore diazez a zo d'e skeul, ha n'eus arguzenn soliet ebet evit kavout anezhi gwelloc'h eget forzh petore skeul savet gant forzh petore strollad ha ken tidel-all... E gwir ez eus aze un danyez studi evit an dud war o stummadur : gwelout a reont war an tomm ul ledemsav - er ster reizh - o tinodif.

"Unaniñ an holl en hevelep spered" n'eo bet nepred un amkan evit an Emsav (sl. Unvaniezh an Emsav, Emsav 11/299 & 303).



Tud an Emsav zo tud evel ar re all ha n'eus enno perzh-natur ebet o mirfe a zihentañ. Dre ar stummadur hag ar frammadur avat e vez fraezh d'an holl e pep mare oberoù hag emzalc'hioù pep hini. Tud 'zo n'int ket evit dezrannañ ar pezh a reont, nag evit gouzañv ma ve dezrannet gant ar re all. Prest int bepred da c'holeiñ an dislavaroù, o re ha re o mignoned, en arbenn eus an diasur m'emañ o spered : repu a glaskont en ur vrizhkeneil-iezhañ a garfent envel unvaniezh. Ar grestenenn voan-se ne guzh ket pell avat ar frailhoù don a zo dindan.

N'eo ket "kompezañ ar skoilhoù" a zo d'ober, met er c'hontrol o diskoachañ, lakaat a-wel kement dislavar a zo en oberoù an dud, ha skeiñ betek ma vent diskoulmet. Tud 'zo a gav re griz labourat en doare-se ha nad eo ket hini peoc'h ar spered. N'int ket graet evit ar politikerezh, ha mont a reont kuit. Ne vez ket dalc'het warno e nep doare. Er c'hontrol e vezont bountet er-maez ma ne gemeront ket o disentez buan a-walc'h.

An unvaniezh ned eo ket pal an Emsav ha n'hon eus ket d'he c'hask, met dont a ra evelkent war ar marc'had : unvanded ar stummadur hag unvaniezh ar framm a vez miret e pep mare.

E/EMVR-105

"Gant evezh em eus lennet "Les Données socio-historiques de l'Emsav". E gwir, ez eus el labour-se ur gelennadurezh, n'eo ket evit an tremened (daoust ma teskriv an tremened-se gant un nerzh garv hag efedus hervez saveleñoù ar gevredadouriezh), met dreist-holl evit an dazont. A-du on ganeoc'h : pep ober a rank loc'hañ diwar selledoù damkanel, anez da se ez echu en dispisted. An emsav flandrezat, al luskad broadelour dreist-holl, en deus anavezet meur a wech ar furm-se a zispisted dirak ar c'hudennoù o tiflukañ, dre ma n'edo ket en e gerz ar meizadoù termenet-don o dije roet dezhañ an tu da anaout ar saviad m'edo hag, a-se, e chome en un diober argollus." (br. ganimp) (31 10 69)

EMVR-106

"Me'm eus difennet, hag a zifenn damkaniou E.S.B. () ouzh meur a Vreizhad, hag aliet dezho deskiñ brezhoneg ha pa na ve nemet evit lenn Emsav. Koulz lavaret holl ar re zo deuet dre amañ a garez ar pezh a reont "SADED" anezhañ. Hag e kredit e teuy an trec'h ganeoc'h dre nerzh ar poelladañ hepken ? ()

"Ne'm eus ket tro da brederiañ na zoken da lenn kement a embann Emsav ha kalz eus ar pennadoù n'int ket aes da gompren. En Emsav e kavan avat ar pep dispac'husañ e Breizh hiziv, hag ar pep gwrizielañ. Ho harpañ a ran evel ma c'hallan. Mat em eus kavet al levrig embannet e galleg. ()

"A-zivout ho tezrannadur eus Breiz Atao e niverenn Wengolo, reizh he c'havan. Spi am eus e viot gouest da gas an daelerezh etre Emsav ha pobl da benn. En un arroudad e rankan abegañ avat. E pelec'h hoc'h eus kavet e veze desket da baotred ar Gwazadur

Arbennik penaos en em gannañ ouzh engroezioù, d.l.eo ouzh ar boblañs ? Gant piv e veze kelennet an dra-se ? E-pad tri bloaz edon er Gwazadur Arbennik, hag e rois kentelioù e teir c'hreizenn : hag ankounac'haet em befe ar rannad-se eus ar c'helennadur ? Ken a vo diskleriet gant Emsav war beseurt teul, war ziskleriadur peseurt test ez eo diazezet al lavarenn-se e kredan-me lavarout ez eo ur gaou. Deskiñ a raemp en em gannañ ouzh un enebour o terc'hel savadurioù a bep seurt, o vont gant hentoù a bep seurt, ne oa ket avat a-enep engroezioù Brezhoned. Hag e plijfe deoc'h embann an dislavar-se, pe neuze kadarnaat an diskleriadur roet gant testenioù resis direndaelus." (03 11 69) EMVR-107

Respontoù d'an div rannbennad kentañ a gavo hon c'henskriver gant ar skrid embannet en niverenn-mañ dindan an talbenn Doareoù dibarek eus ar framm dispac'hel (Emsav 35/329), hag ivez gant ar respont E/EMVR-105 amañ diagent.

An testeni pennañ arveret gant aozerion ar studien "Breiz Atao"... (Emsav 33/263) en arroud ma venegont ar Gwazerezh Arbennik (/273) eo eñvorennoù Youenn OLIER : O sellout war va c'hiz. El levrenn 4, p. 61-65, e tanevell ar perzh a gemeras er 'bezen'. Setu an arroudoù titourusañ : "Ar pezh souezhusañ avat eo e oad kelennet kenkoulz-all war an hentennoù gwellañ da skignañ tolpadou displegadegerion. Yaouank-tre e oan pa stagis da bleustriñ ar 'bezen', triwec'h vloaz" (eleze e 1941, hag ar 'bezen' meneget aze ned eo ket ar Bezenn Perrot krouet goude marv an Aotrou PERROT e 1943). "Padal, ret eo din lavarout ne oa ket bet diskuliet dimp petra oa gortozet diganimp ent resis. Ne veze roet dimp a-hend-all kelennadur ebet diwarbenn natur ha roll ar Stad na diwarbenn politikerezh dre vras" () "Rak-se ivez ez empenned ar 'bezen' evel un doare nerzhkerreizh mennet da zerc'hel an urzh en ur Stad da vezañ savet" () "Dirak hon enseller e oa bet erounezet adarre ur bleustradeg a oa bet kaset da benn ur wech bennak endeo : difenn an Dael, ar "Breudoù", a-enep da zisplegadegerion c'helenus".

Gwir eo ne ra ar skrivagner meneg ebet eus ar Gwazerezh Arbennik er pajennoù-se. E gwall Emsav emañ enta ar fazi. Krediñ a reomp goulenn avat hag ouzhpenn ur fazi war an anv hon eus graet. Reizhadenn hon c'henskriver ne zislavar ket mennad an arroud arzaelet, a oa diskouez ne voe en Eil Emsav aozadur armet ebet o pleustriñ hentoù ar brezel dispac'hel.

E/EMVR-107

"Hon darempredoù kentañ gant ar boblañs (). Anat eo e ve dib-oell o tont a-berzh un emsaver ar goulennoù hag an arbennadennoù a zeu gant tud an derez mann. Hon emzalc'h koulskoude n'eo ket hini an distaoladur hag an nac'h selaou. Met hemañ : a) klask meizañ ar poell eus petra eo lavarou an dud b) respont dezho, gant kement a basianted ha ma'z eo ret, o klask heuliañ ar poell



a zamwelomp el lavarou-se betek difourkañ war un dislavar diabarzh; ur wech lakaet a-wel d'ar c'hendivizer an dislavar-se, ha neuze hepken, e kinnigomp un diskoulm heboell, - pouezañ a reomp warnañ n'eo ket peogwir ez eo emsavel, met peogwir ez eo heboell; brudañ an Emsav n'eo ket brudañ E.S.B., met an diskoulmoù heboell a ro an Emsav an tu da gavout; E.S.B. a rank prouñ dre an devoud ez eo eñ ar gwellañ diskoulmer a zo e Breizh." (03 11 69) EMVR-108

"Loc'het mat eo al labour war diriad T. Tud nevez a-grenn a zarempredomp. Entan a sav, hag ivez kudennoù peurnevz dimp () disheñvel diouzh ar re hon eus bet da ziskoulmañ abaoe seizh vloaz.

"Klasket em eus kompren an entan a sav e reoù 'zo eus hon danvez izili nevez, kejet outo e miz here evit ar wech kentañ. Setu ur brastres eus va dezrannadur kentañ.

"An holl dud a zo deuet da E.S.B. betek an hañv-mañ zo deuet dre zor ar "stourm sevenadurel". Netra souezhus : dre an nor-se ivez e teuas krouerion E.S.B., hag E.S.B. e-unan n'eo deuet da vezañ ar pezh ez eo, ur framm politikel, nemet dre un eilpennadur o lakaat ar yezh en he flas, diziouerus met eilrenk. () Bremañ e kejompe ouzh seurtoù tud disheñvel diouzh ar re gentañ. An danvez emsaverion nevez a zeu da E.S.B. er mare-mañ n'int ket tud chalet gant ar yezh a priori. Disheñvel-bras eo ar goulennoù a reont diouzh ar goulennoù a rae an danvez emsaverion kozh bodet e-ser bruderezh K.D..

"Da c'houlakadenn-loc'hañ e kemerfen a-walc'h houmañ : evit dont da vezañ dispac'her e rank un den en em zistagañ a-grenn diouzh ar bed kozh, - pe frouezh an darvoudoù pe frouezh un embleustr e ve an distagañ-se. Ret eo ez afe da get ar gevredigezh henvoazel evit ma tiwanfe ar gevredigezh nevez. Met dres er c'heñver-se e chomas an Eil Emsav forc'hellek bepred. E Gwalarn emañ moarvat egin ar gevredigezh nevez ha kentañ lusk an dispac'h; met, lakaet er-maez Roparz HEMON, ne ouezas ket emsaverion ar mare-se dispartiañ fraezh o hir-aezh d'an tremened diouzh o lusk da grouñ ur bed nevez. Dre ziouer a emouiziegezh e lakaent ur bern elfennoù eus ar bed kozh dindan ar skritell Breizh, - ar pezh o redie da vezañ difennourion, - eleze kilstourmerion, - ha n'eo ket krouerion, - eleze dispac'herion. Alese ivez ar bruzhunadur en un niver a stourmoù darnel ha c'hwitus dre ret. An holl liammoù-se a asantent kaout ouzh ar bed kozh a oa kemend-all a hualoù a vire outo a ober an eilpennadur dispac'hel. An eilpennadur dispac'hel a c'houlenn ma tistagfe an den diouzh kement tra a ra Breizh devoudel (se ned eo ket nevez; kv. an Aviel : neb a goll e vuhez he salv; kv. ivez gwengel marksour an den didra, an hini nemetañ gouest da neveziñ ar bed). Un doare all ez eus aze da gompren an troc'hoù en deus graet ar framm abaoe seizh vloaz etrezañ hag an hiniennoù pe ar stolloù diseurt a zo bremañ el led-emsav. An hiniennoù hag ar stolloù-se o deus nac'het kas betek e benn an dezrannadur en dije o distaget diouzh ar bed kozh. Nac'het o deus lezel ar re varv da zouarañ ar re varv, hag int a zo deuet da vezañ douarerion ha neuze douaridi d'o zro, unan oc'h en em interiñ gant ar yezh kozh, egile oc'h en em veziañ gant ar Chouanted, h.a..



"N'eo ket didalvoud menegiñ e kejjomp er mare-mañ gant ar Vrezhoned arallekaetañ a zo er vro, ar yaouankiz vicherour pe implijat, skarzhet diouti betek elfennoù diwezhañ ar vrezhonelezh henvoazel. Hag en em glevout a reomp diouzhtu. Perak ? Peogwir omp heñvel outo. Emaomp o paouez en em beurzistagañ diouzh Breizh devoudel hag emañ ennomp holl an hevelep goullou diabarzh, - ur goullou reteriet gant an dispac'herion, ur goullou o c'houlenn reteriadur gant an didraeion.

"Ar c'hudennoù a sav bremañ zo stag ouzh ar goulenn-mañ : penaos degas reteriadur gant ar goullou a zo en didraeion vrezhon ? N'omp ket evit respont. An embreg hepken a roy ar respont."

(05 11 69)

EMVR-109

"Emgav hor boa gant daou veleg a bled gant ar studierion e S. M he doa pourchaset d'unan anezho un niver a levrennoù ha lennet e oa bet ar skrid ganto. Komzet hon eus e-pad peder eurvezh eus stad an Emsav, stad Breizh, stad ar relijion hag an Iliz. An evezhiadenn gentañ o deus graet a denne da liv marksour an displegadennoù. An eil a oa ar pouez bras roet d'ar sevenadur. Prederiet-bras e oa an daou veleg gant buhez an dispac'her den div gevredigezh. Ur blijadur eo bet displegañ dezho ar gelennadurezh. En em c'houlenn a ran hag e kinnigent evel un trap an evezhiadenn-mañ : an dispac'her a zistruj ar gevredigezh kozh hag a sav ar gevredigezh nevez ne c'hell ket bezañ gwirion gantañ e-unan mar dalc'h da vevañ er gevredigezh kozh. Respontet ez eus bet dezho e samme an emsaver en e vuhez dislavaroù ar gevredigezh ha ne oa ket an Emsav ur repu peoc'hiek met ul lec'h labour ma vez buhez an dislavaroù en un doare lemm. Klask en em droc'hañ diouzh ar gevredigezh a zo da ziskar zo ivez klask en em droc'hañ diouzh an istor ha tec'hout diouzh an Emsav. An hini a glask ur repu en Emsav a vo diskarzhet buan. Plijadur o deus bet o klevout e veze graet diskarzhioù bep an amzer. Sebezet int bet o welout ivez un nebeut embannadurioù brezhonek (Emsav ha Preder). Klasket em eus o lakaat da gompren ne oa nemet un embregerezh istorek e Breizh : an Emsav. N'ouzon ket hag ez on deuet a-benn. Diaes e vo dezho marteze asantiñ d'an dra-mañ : n'eus tu da vezañ kristen e Breizh nemet en Emsav. Dre vras e tezer-annont degouezh an Iliz hag he roll istorek e Breizh evelomp. Unan eus ar veleion a lavare e kave bastus an deskrivadur a ro MARX eus emdroadur ar c'hevredigezhioù. Klasket em eus diskouez dezhañ n'en doa ster ebet komz eus "stourm ar renkadoù" e Breizh. Hogen poan vras en doa d'en em zizober eus e veizframm marksour. N'ouzon ket hag e oa talvoudus kinnig dezho an Emsav evel un anadenn istorel hogen ne'm eus ket kavet doare all d'o lakaat da gompren petra oa an Emsav hag E.S.B.. Pouezet ez eus bet kalz war ziskar ar bed kozh ha krouidigezh ar bed nevez. Ar strolladoù gall zo arallekaus e Breizh. Mirout a reont Breizhiz en anistor. Istor an Emsav zo istor pep emsaver, h.a.. ()

"Evit ur wech em eus kejet gant beleion n'o deus ket aon da gomz eus o istor, eus ar stourm a reont hag ar ster a roont dezhañ."

(08 11 69)

EMVR-110

## NOTENNOU POLITIKEL ( 9 )

## BEVENNADUR BELI AL LEVIERION

## II. - ARAEZIOU BEVENNAÑ BELI AL LEVIERION

Doareoù diseurt zo da vevennañ beli al levieriezh. Reoù 'zo a denn da renad armerzhel ha kevredigezhel ar vro, reoù all a denn d'he renad politikel.

Bevennadur ar veli hervez ar renadoù armerzhel ha kevredigezhel.

Div elfenn zo da lakaat e kont : framm ar c'henderc'hañ, barr an diorreadur.

Framm ar c'henderc'hañ

Div reizhiad vras zo da ziforc'hañ : ar gevalaouriezh, diazezet war berc'hentiezh prevez an araeziou-kenderc'hañ hag ar frankembreger; ar sokialouriezh, diazezet war ar berc'hentiezh foran hag an embregerezh kengladel. Gant an div reizhiad-se ez eus empleget meizadurioù disheñvel eus an darempredoù etre levierion ha levidi.

An damkaniezh kevalaour : bevennadur ar veli dre ar gevalaouriezh.

Er reizhiad kevalaour ez eus un disparti eus ar galloudoù kalz donoc'h eget an hini empennet gant LOCKE ha MONTESQUIEU : rannet eo ar galloud politikel hag ar "galloud armerzhel". Emañ an hini kentañ e piaou al levierion, hag egile etre daouarn ar c'hreantourion, ar vankourion, ar genwerzhourion, h.a.. Gant galloudegezh ar pennoù embrerezh e vez bevennet efedus-kenan hini ar pennoù levieriezh. Bennozh d'ar gevalaouriezh ez eus ul "liested a greizennoù-divizout" : ar Stad, kreizenn-divizout politikel, a rank derc'hel kont eus ar c'hreizennoù-divizout armerzhel ez eo an embregerezhioù prevez.

En enep, er Stad sokialour, ez eo al levierezh ar greizenn-divizout nemeti : etre o daouarn e talc'h al levierion ar galloud politikel hag ar "galloud armerzhel" war un dro : kellidourion ha greantourion ez int war un dro. Ur veli diharz o deus peogwir n'eus galloud all ebet ouzh o bevennañ.

#### Dezvarn an damkaniezh kevalaour.

Teir abegadenn a c'haller ober d'al lakadennoù kevalaour.

Da gentañ, er renadoù kevalaour ne vez ket dispartiet ar galloudoù politikel hag armerzhel ken don ha ma fell d'an tezennoù frankizour reiñ da grediñ. E degouezhioù 'zo ne vez disparti ebet : ur vargodenn eo neuze al levier Stad etre bizied mistri an armerzh. Gwir e oa an abegadenn-se dreist-holl en 19t hag e derou an 20t kantved en Europa. Gwir eo c'hoazh e riezoù isdiorreet 'zo.

D'an eil, n'emañ ket pep Stad sokialour aozet dre ret hervez ur framm kreizennet diwar skouer an Unaniezh Soviedel. Empennañ a c'haller ur Stad sokialour digreizennet, ma ve firmoù kengladel emren oc'h amparañ kemend-all a greizennoù-divizout armerzhel dizalc'h diouzh kreizennoù politikel ar Stad. Perc'hentiezh prevez ar madoù-kenderc'hañ ned eo ket un amplegad ret da emrended ar genderc'herion. E sigur se e weler hiziv o nesaat an armerzhioù sokialour dieubet diouzh ar patrom soviedel hag an armerzhioù kornogel, evel m'hon eus gwelet c'hoazh.

D'an trede, ned eo ket bevennadur beli al levierion an doare nemetañ da ziogeliñ frankiz ar geodedourion. N'eo ket dre ur c'hempenn armerzhel hepken pe zoken dre ur c'hempenn politikel e vez diskoulmet an dislavar etre frankiz furmek ha frankiz werc'hek, nag etre frankiz-har zadur ha frankiz-perzhiadur.

#### Barr an diorreadur

Studi ar broioù isdiorreet he deus diskouezet ez eo pouezusoc'h barr an diorreadur eget framm ar c'henderc'hañ evit a sell diogeladur ar frankizioù foran ha bevennadur beli al levierion. Daou wered enebek zo gant an isdiorreadur er c'heñver-se.



An isdiorreadur, elfenn oc'h aesaat bevennadur ar veli.

Dre un devouderezh eeun, fizikel, e laks an isdiorreadur skoilh-où ouzh embregadur ar veli : penaos lakaat ur galloud politikel kreñv da ren pa n'eus na hentoù, na pellgehenterezh hag amaezhiadurezh arnevez er vro ?

An isdiorreadur, elfenn o skoilhañ bevennadur ar veli.

Kresk ar broioù isdiorreet a ampleg ur Stad kreñv. Dav eo eil-pennañ frammoù warlerc'hiet un armerzh henvoazel faezhet ha dre-se goulenn aberzhioù ponner pe ponneroc'h digant ar boblañs, savelañ ur steuñverezh strizh, ar pezh na glot ket gant lieselezh ar c'hreiz-enoù-divizout armerzhel.

A-du-rall, n'eo ket douget poblañsoù ar broioù isdiorreet, gant a izel ez eo o barr-stuziadur ha -stummadur politikel, da embreger ar frankizioù foran; ar re-mañ, e diouer ar stummadur keodedel ha politikel, a chom er-maez eus o freder. E Kornog Europa, en 19t hag en 20t kantved ez eo aet kenstur diorreadur ar frankizioù foran hag an diorreadur armerzhel. An isdiorreadur a vez alies ivez un isdiorreadur eus ar frankizioù foran.

Bevennadur ar veli dre an ensavadurioù politikel.

E-touez an ensavadurioù politikel hon eus deskrevet en Notennoù Politikel diagent, e tenn reoù 'zo da vevennañ beli al levierion, ha reoù all en enep d'he c'hreñvaat ha d'hec'h astenn. Un addisoc'h n'eus ken aze, rak n'emañ ket pal an ensavadurioù-se gant bevennadur pe astennadur ar veli stadel. En tu all dezho avat ez eus argerzhadoù kalvezel dibarek a zo o fal kentañ bevennañ beli al levierion.

Bevennadurioù oc'h addisoc'hañ diouzh framm al levierezh

Un niver a argerzhadoù arveret evit dibab al levierion ha frammañ al levierezh a denn a-benn ar fin da vevennañ o beli.

An dilennadur zo unan eus an doareoù efedusañ da vevennañ ar veli. O doujañs d'an dilennerion zo un hual kreñv war al levierion,

- da nebeutañ pa vez dieub an dilennadegoù. Dre an dilenn e vez ar bobl e tro da zougen ouzh he c'hannaded an handal gwashañ : o disk-arzhañ eus ar veli bolitikel.

Rannadur an arc'hwelioù etre al levierion a laka harz ivez d'ar veli. Empennet e voe disparti ar galloudoù gant LOCKE ha MONTESQUIEU evel un araez end-eeun da vevennañ al levierzh. "Ar galloud a harz ar galloud" a skrive MONTESQUIEU. E lec'h all (Emsav 30/187) hon eus roet skouerioù eus ar roll bevenner, reoler, starder a zo gant organoù 'zo eus al levierzh, gant an Dael pergen. Merket hon eus ivez penaos edo ereet er riezoù a-vremañ difennerezh ar frankizioù foran ouzh bezañs un Dael el levierzh.

Al lezioù-barn dizalc'h zo ivez un araez-reoliñ ha -bevennañ efedus. Dreist-holl pa vez da varn felladennoù politikel pe dambolitikel ez eo dizalc'hted ar varnerion un amplegad start da waranterezh ar frankizioù; an hevelep tra evit a sell reolerezh ar bac'h-idigezhioù da c'hortoz, - reizhiad saoz an habeas corpus da skouer.

Ken pouezus-all eo ar galloud en deus ar barnerezh da reoliñ dezvegezh greadoù an amaezhierzh-Stad. Reizhfurm diouzh al lezennoù e rank bezañ greadoù al levierion. Pa na vezont ket reizhfurm e vezont freuzet gant ar galloud-barn. E Breizh-Veur ez arc'hwel ervat ha dizalc'h ar varnouriezh er c'heñver-se. E Frañs ez eo dizalc'h a-walc'h ar "Conseil d'Etat", lez-veur karget da wiriañ dezvegezh greadoù an amaezhierzh; er c'hontrol, emañ ar varnouriezh keodedel, dre berzh ar reizhiad enraokadur kemplezh a ren enni, e dalc'h ar Gouarnamant.

Ar gevreadelezh hag an digreizennadur zo un doare all, a-zerc'h, da vevennañ ar veli. Ar veli piaouet gant pep Stad amerikan, pep kanton helvetiat a laka harz da c'hourbrientoù al levierion gevreadel. Disoc'hoù heñvel a zeu diwar an emrenerezh kumunel ha rannvroel. Tu ez eus da empennañ ivez un "digreizennadur kalvezel", ur "gevreadelezh kalvezel" o tont da glokaat an digreizennadur hag ar gevreadelezh tiriadel : ar gwazerezhioù foran pe ledforan o piaouañ

emrenerezh a-walc'h evit amparañ kreizennoù-divizout distag diouzh ar galloud gouarnamantel. En doare-se e ve krouet ul lieselezh eus ar c'hreizennoù-divizout disheñvel diouzh al lieselezh diazezet war berc'hentiezh prevez an araezioù-kenderc'hañ.

Lieselezh ar strolladoù ha bezañs un eneberezh pergen zo hiziv azonoù splannañ ar werinelezh kornogel : sellet e vez outo gant Kornogiz evel ouzh ar gwarez surañ rak arvar an hollveliouriezh. Ur c'heal kozh ez eus aze, rak ken abred nag e grez Henroma e veze anvet ul levier karget da vevennañ obererezh al levierion all. Kefridi an Dribuned e oa, engwisket dezho gwir an intercessio (sl. Emsav 32/251). E Breizh-Veur hiziv ez eo ensavadekaet, gant ur roll heñvel, "bleiniad an eneberezh ouzh levieriezh He Meurdez".

Kalvezderioù arbennik da vevennañ al levieriezh

Dindan an titl-se e renker a) ar bonreizhoù skrivet b) argerzhadurioù ar werinelezh dameeun (poblatters, h.a.). O vezañ ma vo gouestlet ur pennad eus an Notennoù Politikel d'ar bonreizhoù, ne reomp nemet o menegiñ amañ : en hevelep doare ma ranker gwiriañ dezvegezh greadoù ar galloud-erounit, e ranker ivez gwiriañ bonreizhegezh an dezvoù douget gant al levieriezh (ken evel galloud-dezvañ, ken evel galloud-erounit).

Lezel a raimp a-gostez damkaniezh an harzadur ouzh ar gwaskerezh, brudet e grez an Dispac'h gall, na voe avat nepred fetisaet en ensavadur ebet : ne vern pe c'houarnamant a c'hell embann gwir ar geodedourion da "herzel ouzh ar gwaskerezh", nepred avat ne anzavo bezañ ar gwasker, gwaskañ a ray kentoc'h war an emsavioù-dieubiñ a vennfe stourm outañ. Ur roll pouezus he deus bet evelkent an damkaniezh-se er c'hedveno : skoazellet he deus da ziorren ar spered-barn el levidi ha d'o c'hizidikaat ouzh kement stumm 'zo a waskerezh.

Argerzhadurioù ar werinelezh dameeun.

Tri seurt a renadoù gwerinek a ziforc'her : a) ar werinelezh eeun evel ma veze en Henved (sl. Emsav 29/142) hag evel ma vez hiziv c'hoazh en un nebeut unvezioù politikel bihan b) ar werinelezh derc'houezel k) ar werinelezh dameeun.



Er werinelezh eeun e vez embreget ar galloud war-eeun gant ar bobl. Er werinelezh derc'houezel e lez ar bobl embregerezh ar galloud penn-da-benn gant he dilennidi. Er werinelezh dameeun e vez rannet embregerezh ar galloud etre ar bobl hag he derc'houezerion : dilenn a ra he levierion, met kenderc'hel a ra neozh da gemer disenteziou 'zo a leviererezh; dre ar mouezhiañ hollek eo ez emell ar bobl e divizoù al leviererezh; alese an anvioù hollek poblvouezhiañ, poblvouezhiadeg roet d'an emelladur-se.

Meur a argerzhadur ez eus d'ar poblvouezhiañ :

Ar poblouarzh, pe gouarzh a-berzh pobl, a ro d'an dilennerion an tu da lakaat gouarzh war un dezv douget gant al leviererezh, ha da virout outi a vezañ erounidek (sl. Emsav 30/188). Ne vez aozet ur vouezhiadeg nemet da heul un ervennadeg o tastum un niver izek a sinadurioù dindan un amzervezh termenet. Ma ne ra ket berzh an ervennadeg-se e teu an dezv da vezañ erounidek e termen an amzervezh merket.

Ar poblaters zo un argerzhadur kalz kreñvoc'h eget ar poblouarzh. Gant ar Gouarnamant e vez kentodet e stumm un danvez dezv kinniget d'ar mouezhiañ hollek. Ne vo degemeret kinnig ar Gouarnamant ha lakaet an dezv dindan erounit nemet mar deu ganti ar muianiver er poblaters.

E-kichen ar poblaters dre ya pe nann, a zo ar poblaters ent strizh, ez eus un eil stumm : ar poblaters dre ziuz pe diuzadeg. Ar Gouarnamant a ginnig neuze meur a zanvez dezv, d'an dilennerion da zibab etrezo.

Ar poblgentod zo ar gwir kentodiñ piaouet gant ar bobl. Aze c'hoazh e krog an argerzh gant un ervennadeg a-du gant un danvez dezv. Ur wech dastumet an niver izek a sinadurioù, mar nac'h al levierion darbenn ar c'hinnig ervennet, ez int endalc'het da aozañ ur boblvouezhiadeg.

Efedusted ar poblgentod a gemm hervez ma vez kinniget un danvez dezv diezpleg, eleze brastreset e stumm un durc'hadur hollek hepken, pe un danvez dezv ezpleg, e stumm un destenn resis pe, da nebeutañ, ur raktres munudaouet.

Ar poblloezadur zo gwir ar bobl da loezañ an Dael. Da gentañ e vez un ervennadeg. Mar gra berzh e vez aozet ur boblvouezhiadeg ha digarget

an holl gannaded mar tizh ur muianiver merket gant ar Vonreizh. Arveret e vez ar poblloezadur en Helvetia; anvet eo Abberufungsrecht.

Un eilstumm eus ar poblloezadur eo an dic'halv, arveret e Stadoù 'zo eus ar Far West amerikan dindan an anv recall. Dilenn-erion a ra un ervennadeg evit ma ve digarget, dic'halvet, ur c'hannad. Mar deuont a-benn da vodañ un niver izek a ervennerion, e aozer ur vouezhiadeg. Mar bez faezhet ar c'hannad e rank en em dennañ.

#### Talvoudegezh ar werinelezh dameeun.

Ar werinelezh dameeun, hag ar poblaters he benveg boasañ, zo dezho spletoù ha displetoù.

Er reizhiad daeliek liesstrolladek e vez alies dispis disoc'h an dilennadegoù : pell emañ a-wechoù korf an dere'houezerion a zerc'h-ouezañ feleun korf an dilennerion. Spletus eo neuze aozañ poblatersadegoù a-benn anaout fraeshoc'h mennoud ar bobl war ur c'hraf resis.

En enep, er reizhiad leviourek, pe er reizhiad daeliek daoustrolladek e kav ar bobl an tu da embann fraezh he youl dre an dilennadegoù ha n'eo ket ken bras neuze an ezhom da arverañ ar poblvouezhiadegoù.

Unan eus arvarioù ar poblatersoù eo risklañ en unezholadur. Evel a ouzer, ar poblaters zo ur poblvouezhiañ war un destenn, an unezholadur ur poblvouezhiañ war un den. Ar poblaters avat a c'hell treiñ aes-tre en unezholadur mar mouezh ar bobl nebeutoc'h e-keñver an destenn ginniget eget e-keñver an den he c'hinnig. Dre seurt poblatersoù unezholadek e c'hell ur Penn Stad kemer hent an diktatouriezh.

#### Pleustr ar werinelezh dameeun.

He mammvro eo Helvetia. Ar poblaters hag ar poblgentod a gaver eno ken er par kevreadel ken er par kantonel. En un nebeut riezoù all en he c'haver ivez.

Er Stadoù-Unanet ned eo ket raksellet ar werinelezh dameeun gant ar Vonreizh kevreadel met gant Bonreizhoù ar Stadoù.

Meneget e oa gant ar Vonreizh tchecoslovak etre an daou Vrezelbed, gant Bonreizh alaman Weimar, - raksellet oa ar poblaters mar beze arguz etre an div vodadenn pe etre an Dael hag Arlevier ar Riez.

E Frañs e voe miret ar poblaters evit mouezhiañ an dezvoù bonreizhel; embreget e voe e-pad an Dispac'h, hag ivez e 1815, 1852, 1946, 1958. Bonreizh 1958 a raskell arver ar poblaters e-keñver an dezvoù war frammadur ar galloudoù foran ha kaougantadur ar feurioù etrevroadel. Pevar foblaters zo bet aozet etre 1958 ha 1969.